


PEDENN AR VAMM

Komzou : Job an Irien


Ton : Ar c'hakous - "Piou lavarado..."




1. Piou 'neus kle - vet, 'traon ar C'hal - var,
 2. Ne oui - e ket, p'oa bet gan - (n)et
 3. Ne oui - e ket ni - je ka - ret
 4. Ne oui - e ket e vi - je bet
 5. Piou 'neus kle - vet, 'traon ar C'hal - var,
 6. E tal ar Groaz e ouel ar Vamm
 7. E tal ar Groaz, heb kre - na kén,



1. Pe - denn ar Vamm, pe - denn heb par?
 2. He 'faour - kêz Mab, e - vid ar béd
 3. He Ma - big dei ha - da an éd
 4. Ar pen - nou braz heb gwir e - béd
 5. Pe - denn ar Vamm, pe - denn heb par?
 6. War ke - ment dén a zoug eur zamm,
 7. E ro Ma ri he Mab d'an dén.



1. Ma - let eo bet he Mab di - namm, ___
 2. 'Ni - je klas - ket be - za ken mad ___
 3. En eur gle - ved ha sa - ve - tei ___
 4. 'Vel ar wes - ped, ouz e dre - gas ___
 5. Ma - let eo bet he Mab di - namm, ___
 6. Ha pouez eur groaz, heb gel - loud kén, ___
 7. Ka - vet deus c'hoaz 'n he di - nez ___



1. Gwas - ket eo bet din - dan e zamm.
 2. 'Vid 'n dud na - het hag em - zi - vad...
 3. Ar plac'h flas - tret, heb barn a - nei.
 4. Hag e spe - ga ouz koad eur Groaz...
 5. Gwas - ket eo bet din - dan e zamm.
 6. Din - dan ar wash, be - za eun dén.
 7. Peoc'h 'vi - dom - ni ha ka - ran - tez.

1. Piou 'neus klevet, 'traon ar C'halvar,
 Pedenn ar Vamm, pedenn heb par?
 Malet eo bet he Mab dinamm,
 Gwasket eo bet dindan e zamm.
2. Ne ouie ket, p'oa bet ganet
 He 'faour-kêz Mab, euid ar béd
 'Nije klasket beza ken mad
 'Vid 'n dud nahet hag emzivad...
3. Ne ouie ket nije karet
 He Mabig dei hada an éd
 En eur gleved ha savetei
 Ar plac'h flastret, heb barn anei.
4. Ne ouie ket e vije bet
 Ar pennou braz heb gwir e-béd
 'Vel ar wespéd, ouz e dregas
 Hag e spega ouz koad eur Groaz...
5. Piou 'neus klevet, 'traon ar C'halvar,
 Pedenn ar Vamm, pedenn heb par ?
 Malet eo bet he Mab dinamm,
 Gwasket eo bet dindan e zamm.
6. E tal ar Groaz e ouel ar Vamm
 War kement dén a zoug eur zamm,
 Ha pouez eur groaz, heb gelloud kén,
 Dindan ar wash, beza eun dén.
7. E tal ar Groaz, heb krena kén,
 E ro Mari he Mab d'an dén.
 Kavet deus c'hoaz 'n he dienez
 Peoc'h 'vidom-ni ha karantez .

LA PRIERE DE LA MÈRE

1. Qui a entendu, au pied du Calvaire, La prière de la Mère, prière sans pareille? Son Fils innocent a été broyé, Ecrasé sous le fardeau.
2. Elle ne savait pas, quand naquit Son pauvre Fils, pour le monde Qu'il aurait cherché à être aussi bon Envers les gens rejetés et orphelins.
3. Elle ne savait pas que son Fils Aurait voulu semer le grain En écoutant et en sauvant La fille meurtrie, sans la juger.
4. Elle ne savait pas Que des chefs sans loi L'auraient harcelé, comme des guêpes Et cloué au bois de la Croix.
5. Qui a entendu au pied du Calvaire, La prière de la Mère, prière sans pareille ? Son Fils adoré a été broyé Il a été écrasé sous le poids.
6. Au pied de la Croix, pleure la Mère Sur tous ceux qui portent leur fardeau Et le poids d'une croix, sans plus pouvoir, Sous le joug, être un homme.
7. Près de la Croix, sans plus trembler, Marie donne son Fils aux hommes. Elle a encore trouvé, dans sa misère, Paix et Amour pour nous.